

YF_0013_Son an Amerik

Breman p'eman deuet ar goanv e ya dister al labouriou
Evid tremen ma zamm amzer ez an da gompoz soniou

Me n'on ket pab na beleg kennebeud skrivagnour
Ma vankan da resitan me ho ped d'am sikour (resitan= gall. réciter)

Evid disklerian dirazoh pezh a zo e-barz ma spered
Deuz ar skleran ma hellin evid bezan komprenet

Dimeuz paotred Breiz-Izel e kaozean deoh hizio
Pere a zo deuet d'an Amerik evid gounid dollariou

Na kuitaet am-eus Speied evid eur pennadig amzer
Evid bezan eurusoh 'benn tistroin d'ar ger

Med kaled eo ar vuhez en amzer a zo breman
Ar bevan a zo ken kaer, dister ar beamant

Ar bevans a zo ken ker, an dilhadou ivez
Ne hell ket eul labourer sevel mad e vugale

Na treuzet eo ar mor braz evel gwir vartoloded
Diskennet e-barz New-York, brasan ker a zo war ar bed

Setu breman emaom digouezet e-barz eur vro nevez
Aman bro an uzinou he ano New Jersey

Ahanta ez an da gontan deoh deuz on douar da vevan
Ar feson d'en em gemer diwar an digoustan

Bevan a reom toud asamblez evel ar soudarded
Ren ar vuhez ar rifein evel ma'z om anvet

N'hellom ket mond d'an hotelou evid debrin on 'frejou
Rag petramant an arhant deuz on daouarn ' goueio

Ni a zo deuet pell deuz ar ger evid gounid dollariou
N'om ket deuet evid o dispign e-barz an ostaleriou

N'om ket deuet d'an Amerik war zigarez pourmen
Ni a zo deuet da labourad evid gounid pinijenn

Na deuit ket d'an Amerik da glask ho plijadur
Aman evid gounid arhant e renker bezan fur

Bezan fur da labourad deuz ar mintin tre an noz
Ni on-eus c'hoant kaoud a-wechou eur momant da repoz

Kaoud a reom a bep seurt labouriou, re louz ha re galed
Labouriou da skuizan d'ar horf ha ya fall d'ar yec'hed

Tremen gand eun tamm bara deuz ar mintin tre an noz
Ha n'edom ket evid lonkan nemed gwin ar baradoz

Ha c'hoaz e klevan lavared ez om tud dirollet
Tud ne garont ket o familh ha memez tud kollet

Ha me a lare ar hontrer eo an dud kalonekan
Lar om deuet d'an Amerik evid gounid peadra

Da zeskin mad on pugale, rein dezo deskadurez
Ha en em sevel o-unan dimeuz an dienez

Evid rein dezo deskadurez vad eun tammig a danvez
Ha rein dezo kalz sikour pa eh efeint er vuhez

Dever an tad a familh nen eo ket ken aez-se
Me ho ped d'an hini a oar da lavared din-me

Ni paotred yaouank om aman a vijem dimezet
Ma vije bet an danvez a-raog oam bet partiet

Gand re on mestrezed bepred ouz on kortoz
Goude ma vim distroet d'ar ger ni a raio dezo mennoz

Me ho ped paotred yaouank pere a zo e-barz ar vro
Da selaou gand interest lod dimeuz ma homzou

Ha pere a zo ataket gand klenved an dansou
Me ho ped da zond aman e-pad eun nebeud bloaveziou

Me ho ped da zond aman e-pad eun nebeud bloaveziou
Da ziskuiz an ho tivesker dimeuz an ebatou

Ma en em lak en ho fantazi dond d'ar bal e-barz e ker
Ma n'ouzoh ket kaozeal saozneg n'ho-peus netra d'ober

Ha neuze ' zistroint d'ar ger evel chas divouetet
En em louzo e-barz o hambr en eur sonjal en o mestrez

Pehini a zo e-barz e Breiz en tu all d'ar mor braz
Hag emichans e kavin bonheur evid dond d'he gwelet c'hoaz

Evid pas en em zisklerian ma ano ne larin ket
Med e larin seulamant on deuz parrez Speied

Ganet on e-barz ar Rubiou e-barz eur ger war an uhel
Designet da veajin bihanig ma havell

Designet da veajin bihanig ma havell
Ma ano e laran deoh me eo Yann Chiterenn